

Evit beva gant levenez


102

Ton nevez. — J.-L. MAYET.

Moderato ♩ = 92.



E - vit be - va gant le - ve - nez, N'euz ket e - zomm aour na per -



lez, Nag eur c'has-tell a ve sa - vet E gern be - tek bro ar ste -



red. Din-dan ar soul, en eul lo - chenn, Ar paour a c'hell c'hoar-zin laou -



en. E - vit be - va gant le - ve - nez, Ka - rit Je - zuz hag ar Ver - c'hez.

Evit beva gant levenez
N'euz ket ezomm aour na perlez,
Nag eur c'has-tell a ve savet
He gern betek bro ar stered.
Dindan ar soul, enn eul lochenn,
Ar paour a c'hell c'hoarzin laouen.
Evit beva gant levenez,
Karit Jezuz hag ar Verc'hez.

Evit beva gant levenez,
N'euz ket ezomm aour na perlez.
Kalon ann den a zo c'hoantuz,
P'en deuz bet guenn e c'houlenn ruz,
Pa vez sec'hor e c'houlenn glao,
Eun dra bennag a vank atao
Evit beva gant levenez,
Karit Jezuz hag ar Verc'hez.

Evit beva gant levenez
N'euz ket ezomm aour na perlez ♩.
Hag ho pefe holl a leve
Leon, ha Treger, ha Kerne,
Gant ho tanvez ne brenfot ket
Eun hanter-devez eurusded:
Evit beva gant levenez,
Karit Jezuz hag ar Verc'hez.

Evit beva gant levenez,
Karit Jezuz hag ar Verc'hez.
Etruz, euz eo ann hini
Zo da Jezuz ha da Vari :
Gant Jezuz hag vamm zantel
Mad eo beva, dous eo mervel :
Evit beva gant levenez,
Karit Jezuz hag ar Verc'hez.